

# WAR E VENO

Komzou : Job an Irien

Muzik : Mikael Skouarneg

*♩ ≈ 72*



War e ve - no a - berz Dou - e, An dén Je - zuz zo deut 'vi - dom  
Ha pa n'em ge - mer 'vid Dou - e D'ar ma - ro vo bar - net gan - (n)eom. *Fin*

*Unan*



1. E zis - ki - bien: pes - ke - tou - rien N'a - na - ve - zont ket al le - zenn!  
2. Eun deiz 'neus pa - re - et eun dén, Daoust d'ar skri - bed, 'deiz ar Za - bad;  
3. Da ge - ment dén e ti - gor braz An hent a gas da di an Tad;


*An oll*



1. Eur pu - bli - kan a zo gan - to Da blec'h ez aim gand tud 'vel - to?  
2. "Ar Za - bad 'zo greet 'vid an dén Ha nann an dén 'vid ar Za - bad".  
3. Es - trañ - jou - rien ha pe - he - rien O - deus gan - tañ di - ge - mer vad.

Poaz 3 : Diskan

*Unan all*



1. Eet eo da lo - ja ti Za - che, Pu - bli - kan braz a Je - ri - ko  
2. D'eun dén a oa bet gan - (n)et dall E zaou - la - gad 'neus di - go - ret  
3. D'ar be - he - rien ar par - don 'ro 'Pez n'eo po - subl 'med da Zou - e

*An oll*



1. "Oa ket 'dud vad en an - dred - se D'e zi - ge - mer ke - ne - tre - zo?"  
2. Dre nerz an diaoul ha ne - tra all E ra bur - zu - dou dre ar béd.  
3. La - kaad a ra 'n dis - pac'h er vro Poent eo la - za ar c'han - fard - se. *D.C.*

# WAR E WENO

**War e veno a-berz Doue,  
An dén Jezuz zo deut 'vidom  
Ha pa n'em gemer 'vid Doue  
D'ar maro vo barnet ganeom**

1. E ziskibien: pesketourien  
N'anavezont ket al lezenn !  
Eur publikan a zo ganto  
Da blec'h ez aim gand tud 'velto ?

Eet eo da loja ti Zache,  
Publikan braz a Jeriko  
"Oa ket 'dud vad en andred-se  
D'e zigemer kenetrezo ?"

>> *Diskan*

2. Eun deiz 'neus pareet eun dén,  
Daoust d'ar skribed, 'deiz ar Zabad ;  
"Ar Zabad 'zo greet 'vid an dén  
Ha nann an dén 'vid ar Zabad".

D'eun dén a oa bet ganet dall  
E zaoulagad 'neus digoret  
Dre nerz an diaoul ha netra all  
E ra burzudou dre ar béd.

>> *Diskan*

3. Da gement dén e tigor braz  
An hent a gas da di an Tad ;  
Estrañjourien ha peherien  
O-deus gantañ digemer vad.

>> *Diskan*

D'ar beherien ar pardon 'ro  
'Pez n'eo posubl 'med da Zoue  
Lakaad a ra 'n dispac'h er vro  
Poent eo laza ar c'hanfard-se

>> *Diskan*

*D'APRÈS LUI*

*R: D'après Lui, de la part de Dieu,  
L'homme Jésus est venu pour nous  
Et puisqu'il se prend pour Dieu,  
Nous Le condamnerons à mort.*

1. *Ses disciples : Des pécheurs,  
Ils ne connaissent pas la loi !  
Un publicain est des leurs,  
Où irons-nous avec des gens comme eux?*

*Il est allé loger chez Zachée,  
Grand publicain de Jéricho  
"N'y avait-il pas de braves gens en cet endroit  
Pour L'accueillir parmi eux? "*

2. *Un jour, Il a guéri un homme  
Malgré les Scribes, le jour du Sabbat?;  
"Le Sabbat est fait pour l'homme  
Et non l'homme pour le Sabbat".*

*D'un homme aveugle-né,  
Il a ouvert les yeux ;  
C'est par la puissance du démon et rien d'autre  
Qu'il fait des miracles à travers le pays.*

3. *À tout homme, Il ouvre grand  
Le chemin qui conduit chez le Père ;  
Étrangers et pécheurs  
Sont bien accueillis par Lui.*

*Aux pécheurs, Il donne le pardon,  
Ce qui n'est possible qu'à Dieu,  
Il met la révolution dans le pays,  
Il est temps de tuer ce drôle.*